

kazetenñ ar stourmoù e breizh

ECHU EO HO KUMANANT

bremañ

niv. 8 here-du 1981 6 lur

TRAVAILLEURS DE BRETAGNE
BURERIEN YREIZH

NAONED E BREIZH

10 hag 11
a viz here
1981

UR STAL-GENLABOUR E KEMBRE:

Ffôn - Llinfaen (075 885) 698

ANTUR AELHAERN
LLANAELHAERN
CAERNARFON - GWYNEDD

Cyflwynwyd gan / Presented by: Mr. Gordon Sheppard

antur
aelhaearn

Llanaelhaearn zo ur gêriadenn vihan e ledenez Llyn, e kontelezh Gwynedd, ha ganti kudennoù maeziou Kembre hiziv. Gant ar mengleuzioù greunvaen o serrif hag an atantoù o kreskiñ o ment, e krog ar boblañs a 250 den da zigreskiñ. Gwashoc'h eo c'hoazh gant implij ar mekanikoù war an atantoù. Ha troet eo an dud da vont da chom e kêrioù brasoc'h ma chom kreizennet enne aesamentoù a bep seurt.

Gant se e vez kollet labour er gêriadenn. Hag ouzhpenn e teu an dud d'en em santout lezet a-gostez.

Buhez ar gêriadenn oa o vont war diskar. Nebeutoc'h a vugale er skol, ar bus ne zeu ket ken betek enni, hag ar 7 stal a oa bet a-raok ne chome nemet unan. Ha hi bihan, e vire ar gêriadenn un ti-post, un ti-polis, un infirmiourez, daou garrdi, ur medisin hag ur person.

E 1970-71 e voe gonezet ar stourm evit mirout ar skol gant Kevredigezh ar Gerent. Diwar-se e voe savet Kevredigezh Tud ar Vourc'h evit stourm enep d'an dibloblañ.

E 1973, daou zen a dremenas eizhtez e Cleire, un enezenn eus Iwerzhon, evit studiañ doareoù ur stal-kenlabour a glaske Iwerzhoniz diluziañ ganti kudennoù heñvel ouzh hon re. Neuze e voe klasket gant hon c'hevredigezh sevel un aozadur a-seurt-se ivez e Llanaelhaearn.

Abaoe 1974 eo diskleriet Antur Aelhaearn evel ur gevredigezh hervez lezenn.

PENAOE E YA EN-DRO ?

Kement hini zo en oad da votif e Llanaelhaearn a c'hall prenañ ul lodenn fl (11,00 lur gall), hag e c'hall neuze votif en emvodoù an Antur. A-hend-all e c'hall tud eus an diavaez prestañ arc'hant evit netra pe gant un interest a 10 % a c'hallont paeañ bep bloaz ma karont, hep n'o defe ar gwir da votif. Gant an arc'hant-se hon eus ar spi da ziorren stalioù-labour amañ.

160 den eus Llanaelhaearn o deus prenet lodennoù, ha f9 000 zo bet resevet eus an diavaez.

Savet hon eus ur stal-stammañ, ha stummet tud da gas al labour da benn.

Eskennoù zo bet gant tud eus Cleire, gant Innis Mor (unan eus an Inizi Aran) en Iwerzhon, ha gant Bara (unan eus an Inizi Hebridez) e Bro-Skos.

Reoù all e Kembre o deus klasket ober evel domp. C'hwitet o deus betek-hen. Evel domp n'o doa ket bet sikour digant ar Velestradurezh. Posubl eo en em c'houlenn perak.

Bremañ e klaskimp ivez gwellaat ar vuhez evit an dud zo chom amañ, hag aozañ oberiantizoù evit ar re yaouank.

Spi hon eus ne zigalonekao ket ar re a fell dezho heuliañ hon skouer.

Troet diwar ar c'hembraeg.



BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

KELAOUENN SOKIALOUR BREIZHEK

LIESDOARE: POLITIKEREZH ETREVROADEL, STOURMADOÙ AR VRO SEVENADUR, BANDENNOÙ TRESET...

KOUMANANT BLOAZ 30 LUR - SKOAZELL: AD, 50 LUR

DA: AL LANV, 7, ST. AR REKTOR PAUL HENRY 35000 ROAZHON

NANT GWRTHEYRN

AR WERTH
CYNNIG UNIGRYW

DA WERTHAN



NANT GWRTHEYRN zo ur gêriadenn varv eus ledenez Llyn e Kembre, etre ar mor hag ar menez. 23 zi zo enni, hanter-dismantret ha goullto an holl anezhe.

Prenet int bet evit bezañ adkempennet gant ur Gevredigezh a zo he fal sevel ur greizenn evit ar re o deus c'hoant deskiñ ha bevañ e kembraeg.

Gouel unvaniezh Breizh

10.11 a viz here 1981

DEN NE ZLE C'HWITAN EMGAV BRAS AR SUL 11 A VIZ HERE E NAONED EVIT ADSTAGAN AL LIGER-ATLANTEL OUZH PEURREST AR VRO.

BREMAN HAG EVIT AR WECH KENTAN, A-DRUGAREZ D'AR GALLOUD POLITIKEL A-GLEIZ HA DA NIVER AR SO-SIALISTED BET ANVET EVIT BREIZH E PARLAMANT BRO-C'HALL (19 DIWAR 33) E C'HELLOMP GWELOUT HOR STRIVOD HAG HOR STOURMADOÙ O TISOC'HAN A-BENN AR FIN.

SETU AMAN AR PEZH A SKRIVE SEKRETOURIEZH EROADEL AR STROLLAD SOCIALIST E-BARZH "REGIONS ET PEUPLES MINORITAIRES, UN DES DROITS A LA DIFFERENCE" :

"AR RANNVRO EO AL LEC'H GWELLAN DA REIN AN TU D'AR POBLOÙ BIHAN DA ADKAVOUT O FERSONELEZH. PA VO BET SAVET AR RANNVRO DEMOKRATEL GANT AN TU KLEIZ E VO ROET UR FRAMM D'AR POBLOÙ BIHAN MA C'HELLINT DISKOULMAÑ O C'HU DENNOÙ ENNAÑ."

DA WELET MEUR A VINISTR EO AET AN DUD A ZO E-BARZH BUREV AR C'HUZUL EVIT ADUNVANIDIGEZH BREIZH, DIJA. KREGIN A REONT DA VEZAN KLEVET. MICHEL ROCARD, E-BARZH "LE MONDE" EUS AN 9 A VIZ GWENGOLO EN DEUS DISKLERIET "E VEFE RET MARTEZE KOMZ EUS TERMININ A-NEVEZ BEVENNOÙ RANNVROIOÙ ZO". "JOURNAL OFFICIEL" AN 11 A VIZ GWENGOLO A RA MENEG EUS AR RANNVROIOÙ E-LEC'H MA SAV GOULENNOÙ HAG EN O ZOUZ : AR "PAYS-DE-LOIRE".

BREMAN EO E SERVIJ DEOMP AL LABOUR HAG AR STOURMADOÙ BET RENET E-PAD AR BLOAVEZHIOÙ TREMNET. EVEL-SE EN DEUS GALLET AR C'HUZUL EVIT ADUNVANIDIGEZH BREIZH SEVEL UN TEULIAD (DOSER) O TISKOUZ AR MANIFESTADEGOÙ A ZO BET ABAOE 1976. PA OAMP 5.000 AR WECH KENTAN EN NAONED NE OAMP NEMET 500 AVAT AR WECH DIWEZHAN (1980) EVIT DER-C'HEL GANT UR STOURM M'EN DOA MEUR A HINI KOLLET KALON ENNAÑ.

TUD ZO AVAT, N'O DEUS MORSE KOLLET AR SPI HAG O DEUS LABOURET A-HED BLOAVEZHIOÙ DA ZIHUNIN TUD BRO-NAONED HAG AR VRETONEZ ALL. TUD EVEL YANN POUPINOT (AET DA ANAON) EN DEUS SAVET UL LEVRIG "LE SENTIMENT D'APPARTENANCE A LA BRETAGNE EN LOIRE-ATLANTIQUE" PE, MICHEL NOURY, KROUER AR GEVREDIGEZH "B5", HA PET HA PET ALL. E-TOUEZ AR STROLLADOÙ SEVENADUREL HA POLITIKEL EO BET ROLL SKOL AN EMSAV EUS AR RE BOUEZUSAN, DRE GREIZENN AN NAONED, PEOGWIR EO BET HE FAL LANSAÑ UR VANIFESTADEG VRAS A ZO BET SAVET EVIT AR WECH KENTAN E 1976 HAG HE DEUS STRIVET DA ZEGAS GANTI AN NERZHIOÙ ALL A-GLEIZ (U.D.B., AR FALZ...) EVIT OBER EUS AR STOURM-SE UR STOURM POBLEK HAG ARAOKOUR.

KOULSKOUDE, ARABAT DEOMP KREDIN EO A-WALC'H EVIT MA YELO AR MAOUT GANEOMP. MARD EO DIGOROC'H AR GALLOUD-KREIZ BREMAN, NE DAOL PLED NEMET OZH AR RE A LAKA O MOUEZH DA VEZAN KLEVET, OZH AR RE A OAR DISKOUZ EZ EO POUZUS HA POBLEK AR PEZH A C'HOULENNONT. AN AOTREEGEZH (LISANS) VREZHONEG A ZEGAS AR WIRIONEZ-SE DA SONJ DEOMP. KRENV E CHOM C'HOAZH GALLOUDOÙ AN ARC'HANT, HINI AR SERVIJOÙ-STAD KREIZENNOUR (GWELOUT AR BRUDEREZH GRAET EVIT AR "PAYS-DE-LOIRE").

EVIT BRO -NAONED HAG EVIT AR STOURMOÙ DA ZONT, NE VO TREC'H EBET HEP UNVANIEZH HON HOLL NERZHIOÙ. EVIT BEZAN 10.000 PE OZHPPENN EN NAONED, HINI EBET AC'HANOMP NE ZLEO MONT DA BESKETA D'AN DEIZ-SE.

REDADEG EVIT NAONED E BREIZH

GOUEL UNVANIEZH BREIZH evit ar melestradur a vo dalc'het en NAONED d'an 10 ha d'an 11 a viz Here a zeu. Hiriv c'hoazh siwazh, melestradur Breizh ne ra ken nemet gant 4 departamant, hini al Liger Atlantel o vezañ bet lammet kuit gant ar gouarnamantoù a-zehou ha staget ouzh "Bro al Liger".

Rannañ evit bout mestr... ul lavarenn stur a aomp boaz outi dec'h... met abaoe dec'h... bez eus bet an 10 a viz Mae. Ha neuze ? ha neuze betek-hen netra ! Ha neuze Skol An Emsav oc'h aozañ ur redadeg. Pep hini en deus ar basianted a c'hell keta ? 305 km dindan 2 zevezh, piv 'n dije kredet ?



- TRAOU PLEUSTREK -

305 km dindan 2 zevezh, un tam-mig ouzhpenn ar pezh 'zo ret kwa ! Aozet hon eus an traoù koulskoude, e seurt ma vefe tu d'en emgavout araok an noz e pep lec'h. Evit ar sadorn eta an hent BREST-REDON (225 KM) a zo bet troc'het e 4 tamm. War bep hini diouto e vo ur redadeg emren. Studiet eo bet an afer hag an amzer memes tra evit ma c'hellfe ar re gentañ en emgavout mont da welout o gamaraded 50 km pelloc'h. (Sellout ouzh ar follenn all).

Evit ar sul 11, memes abadenn, an hent REDON-AN NAONED a zo bet graet 2 damm anti. Pep skipailh a ranko eta ingalañ e rederien (paotred ha merc'hed) war gement pennad hent a vo.

AR SKIPAILHOÙ : a ranko kontañ en o zouesk 25 pe 30 a dud da vithañ. Bez e rankint bezañ emren (kirri, peadra da vouetañ ha da evañ). Bez e rankint ouzhpenn kavout peadra da lakaat war getin o rederien evit ma vlijent anavezet a-bell (tee-shirt pe ul llin bennak war ar c'hein). Pep reder a ranko soñjal

ivez en e asurafis personel evitma vefe diskarget Skol An Emsav deus pep kiritiezh m'en emgavfe un darvoudig bennak.

BOUED HA LOIEIZ : a gavo ar rederien hag ar re a vo ganto d'ar sadorn d'an noz e Ti-Kendalc'h e St VISANT /OUST e-kichen Redon (en em enskrivañ ar buanañ ar gwellañ eta). Ur fest-noz a vo aozet e Redon ivez (sikour a raio da leuniañ ar c'hef).

UR SKODENN JO Lur /reder hag ambrouger (pred + nozvezh + dijuni + frejoù) a vo da gas da Skol An Emsav (c'hekenn vrezhoneg) asambles gant an enskrivadur.

AR FEST-NOZ (Redon) hag ar gouel (NAONED) a vo evit NETRA evit ar rederien ha 7 ambrouger/skipailh (ret eo kaout 7 karr dre skipailh).

UN EMVOD EVIT AOZAN AN ABADENN a vo dalc'het disadorn 12 a viz gwengolo e Ti Kendalc'h (2 eur goude lein) e Sant Visant. TOUT AN DUD ZO PEDET



NAONED E BREIZH !

SKINGOMZ HA

Reuz bras a zo er mape-mañ en-dro da gement a sellouzh ar radio hag an tele. E Pariz n'eus ket un devezh hep ma vefe kaoz eus ar cheñchamantoù e penn ar c'hevredigezhioù : Radio-France, TF1, Antenne 2, FR3, TDF. Met petra cheñcho evidomp e Breizh ? Sindikad SRNT-CGT FR3 "Breizh - Broioù al Liger" en deus savet studiadennoù ha graet kinnigoù dedennus. Diouzh un tu all eo bet savet e-pad an hañv ur gevredigezh hec'h anv "KEVREDAD BREIZH AR RADIOOÙ-LEC'H HA BRO" (Fédération Bretonne de Radios Locales et de Pays). Hag a-greiz-holl, setu ma klevomp an Itron Michèle COTTA, renerez nevez Radio-France, o lavarout e vo savet ur radio-lec'h dizale e departamant "Penn-ar-Bed" (ar politikerezh-se a oa dija en amzer Giscard). Evit ar poent, avat, n'eus ket kalz tra nevez evit ar skinwel. Marteze eo c'hoazh ur pal re uhel evit ar re 'zo o labourat war-dro doareoù nevez ar radio-tele. Anat eo evit an holl pouez ar pezh a vo graet war an tachennoù-se. Hag en un doare ispisial evit ar brezhoneg.


Petra eo ar radio e Breizh hiriv ?

Breizh hiriv : "RADIO-ARMORIQUE" diouzh un tu, "RADIO PAYS-DE-LOIRE" diouzh un tu all. Mont a reont en-dro gant nebeut-tre a dud, al lod vrasañ anezho hep statud ebet. Ne dalv ket ar boan komz adarbez eus plas dister ar brezhoneg. Gwelomp kentoc'h penaos emañ kont war an dachenn deknik gant sikour an div gartenn-mañ.

gwagennoù berr-tre

War ar gartenn gentañ emañ rouedad ar gwagennoù berr-tre (FM). Ar re-se n'hellont ket bezañ skignet pell. Harzet e vezont gant an disterañ torgenn. Sklaer-tre e klevet ganto avat peurlviziañ. Evit lakaat un abadenn da vezañ klevet war un dachenn ledan dre ar gwagennoù-se (FM) e ranker kaout ur rouedad skingaserioù pe adskingaserioù (emetteurs, ré-émetteurs). Er mod-se e vez klevet abadennoù "Radio-Arvorig" war Vreizh a-bezh (nemet Bro-Naoned) dre skingaserioù a zo e Roc'h Tredudon (evit Leon, Treger, ha darn eus Kerne), Gwened-Moustoer (Bro Wened ha darn eus Kerne), Sant-Pern (Bro Roazhon ha Pentevr).

gwagennoù berr-tre (F.M.)




War ar gwagennoù berr-tre e klevet e Breizh : France-Inter (Fi), France-Culture (Fc) ha France-Musique (Fm) adkaset dre skingaserioù Roc'h Tredudon, Sant Pern, Moustoer ha Haute-Goulaine. Radio Armorique ha Radio Pays de Loire a vez skignet o tizel skingasadennoù France-

Inter, eus 7eur15 da 7eur30 9eur00 da 17eur30

ha d'ar Sul, eus 18eur00 da 19eur00. Radio Brest ha Radio Gwened a "ziskrog" d'o zro diouzh Radio Armorique evit skignañ o abadennoù.

Peseurt radio e Breizh



A-hend-all ez eus programmoù disheñvel gant "Radio Pays-de-Loire".

Radio-Arvorig" a skign e abadennoù war ar rouedad hirderioù gwagennoù dalc'het a-hend-all gant France-Inter (FM) eus 7 eur 15 da 7 eur 30 hag eus 9 eur da 12 eur 30. D'ar Sul ez eus un abadenn ouzhpenn etre 18 eur ha 19 eur.

N'eus nemet Roc'h Tredudon ha Moustoer o skignañ an abadennoù brezhoneg war F.M. Dre-se ne vezont klevet nemet e Kornog ar vro.

Tri skingaser a zo gant ar rouedad FM e Breizh : unan evit France-Inter, unan evit France-Culture, unan evit France-Musique stéréo (gwel ar gartenn).

gwagennoù etre

A-hend-all e vez skignet "Radio-Arvorig" dre ar gwagennoù etre, dre skingaserioù Roazhon-Thourie (423m - 710 kHz) ha Brest-Kimerc'h (214m 1403 kHz). War ar gwagennoù-se e vez adkaset programmoù France-Culture pa n'eus ket reoù "Radio-Arvorig". N'eo ket gwall-vat ar c'hleved avat pa vezont selaouet eus pell a-walc'h.

KINNIGOU C.G.T. FR3 evit ar radio

Kinnig a ra sindikad CGT FR3 skignañ abadennoù radio e-pad 17 pe 18 eurvezh bemez gant "Radio-Breizh" war ar rouedad FM implijet peurlviziañ gant France-Inter. Ul lodenn a vefe e brezhoneg.

Diouzh un tu all, ar gwagennoù etre (France-Culture) a vefe gouestlet penn-dabenn d'ar brezhoneg. N'eo ket gwall vrav na gwall aes ar c'hleved ganto alies, dreist-holl evit Breizh-Izel. Met, sañset e vefe kalz gwelloc'h ur wech krefvaet nerzh ar skingaser. Soñjal a ra da CGT FR3 e vefe tu, diwezhatoc'h, da harpañ ar chadenn radio brezhonek gant ur rouedad FM nevez.

Ur rouedad FM a vefe krouet ivez evit Bro-C'hall.

Ouzhpenn-se e vefe ur rouedad radiooù-lec'h liammet kenetrezo hag ur skingaser en ur c'harr o vale dre ar vro.

Setu eta ar framm kinniget :

- 1 framm rannvro e galleg (klevet a-bell).
- 1 framm rannvro e brezhoneg (klevet a-bell-tre).
- 1 framm radiooù-lec'h (skingaset a-wechoù war ar frammoù rannvroel).
- 1 radio o vale bro.
- 1 framm evit an dampedroù etre an holl re all.

SKINWEL

A-BENN PEGOULZ E BREZHONEG ?

Ur bevare chadenn skinwel a zo da vezañ lakaet da vont en-dro e Breizh-Veur. Kembraek e vo e Kembre.

Nac'het eo bet e-pad pell gant gouarnamantoù Callaghan ha Thatcher. Gounezet eo bet goude stourm hir Cymdeithas yr Iaith ha goude ma voe gourdroutzet gant Gwynfor Evans yunañ betek ar marv.

An abadennoù vo aozet gant BBC, ar chadenn brevez HTV, ha produktourion brevez all. Kregiñ a raio e miz Du 1982, gant 22 eurvezh bep sizhun, skingaset dreist-holl etre 6e30 ha 10eur noz.


90 % eus poblañs Kembre a c'halla klevout an abadennoù adalek an devezh kentañ.

Abadennoù saoznek ar bevare chadenn a vo embannet d'an eurioù ne vo ket kembraeg.



SIANEL PEDWAR CYMRU

SIANEL CYMRU 4



Gwasanaeth Teledu Cymraeg i Gymru

Petra c'houlenn ar CGJ hag an Talbenn Sevenadurel diouzhtu

TELE/SKINWEL BREZHONEG

2 abadennoù "Breizh o vevañ" ar sizhun da lavarout eo, da skouer :

- 4 pe 5 danevell ar miz : enklaskoù, poltredoù, istorioù berr, nevezentioù.
- un abadenn istor.
- un abadenn diduñ (sketchoù, sonerezh...).
- un abadenn evit ar vugale.
- div pe deir gwech bep tri miz : ur pezh-c'hoari pe un telefilm (52 vunutenn) ouzhpenn an div abadenn ar sizhun.

TELE/SKINWEL GALLEG

Abadennoù 26 munutenn pe 52 vunutenn e-lec'h 13 munutenn bremañ.

GALLAOUEG

7 abadennoù 26 munutenn ar miz.

RADIO/SKINGOMZ BREZHONEG

5 eurvezh bemdez klevet war ar 5 departamant (produa-durioù ha magazinoù).

RADIO/SKINGOMZ GALLEG

10 eurvezh bemdez abadennoù liesseurt : danevelloù, pezhioù-c'hoari, magazinoù...

Digeriñ en-dro ar studioù serret (S. Brieg, an Oriant).

GALLAOUEG

1 eurvezh gallaoueg ar sizhun.

KENURZHIADUR AR RADIO-TELE

Dibab ar programmoù a rankfe bezañ fiziet en ur bodad ennañ dileuridi ar re a selaou pe a sell ouz an abadennoù, kevredigezhioù sevenadurel, realizatourien, produerien.

Dindan 2 vloaz e rank FR3 Breizh "Broioù" Al Liger dont da vezañ ur gevredigezh rannvroel emren demokratel ha digor d'an holl e servij ar bobl gant an dud hag ar binvioù evit reiñ keleier ha sevel abadennoù.

RADIO ADOUR-NAVAR

Skol An Emsav ha Radio Finister

Emañ an Itron Cotta, PDG "Radio-France" o paouez kemenn e vo savet ur radiolec'hel e departamant Pennar-Bed. Hep bezañ a-enep da c'hortoz gouzout hiroc'h e ra Skol An Emsav an toullad goulennoù :

Evit peseurt ezhommoù e vo savet ? Peseurt darempred zo gant radio FR3 ?

Daoust ha labour a vo roet da dud ar vro (o stummañ anezho diouzh ret) pe e vo kaset eus Paris renerien, teknikourien hag animatourien ?

Daoust hag-efñ e vo ar radio-se distag diouzh buhez sevenadurel Breizh pe benveg ar boblañs ? Pehini 'vo plas ar brezhoneg ha dre-se hini an animatourien ha teknisiañned vrezhonek ?

Ali piv zo bet goulennet e Breizh ?

Goulennet eo bet gant an Talbenn Sevenadurel Araokour (Skol An Emsav ezel anezhañ), bezañ resevet gant an Aotrou Fillioud, ministr an Darempredoù evit ober dezhañ kinigoù. Gortoz a ra atav ar respont.

Ha da c'hortoz, e talc'h Radio-France gant ur politikerezh disunvan bouc'het e-pad ar renad-kent ha divizet e Paris hervez c'hoantoù un nebeud tud.

Ar pezh a c'houlenn Skol An Emsav eo ur politikerezh hollek hag unvan evit ar radio hag an tele e Breizh, savet gant ar Vretoned o-unan evit respont d'o ezhommoù ha d'o falioù, dre ar c'huzulioù rannvroel ha lec'hel, ar c'hevredigezhioù hag ar sindikajoù intereset, ha meret gant ur gwir servij-pobl breizhek.

Ur "radio dieub" eo Radio Adour-Navarre. E Baiona emañ diazezet abaoe un nebeut mizezhioù, goude bezañ bet "en tu all eus ar Pireneoù" pa oa startoc'h eget bremañ lezenn ar monopol. Koulskoude n'en doa ket da gaout kalz aon. Ur jiskardian yaouank eo an hini a zo en e benn. Met hervez klevet, ne vefe ket ken jiskardian bremañ. De La Cerda an hini eo.

Tro am eus bet da glevout ar radio-se e penn kentañ miz Gwengolo ha zoken da gomz gant unan eus e animatourien.

War a seblant eo troetre ar radio war ar sportoù -eus ar mintin betek an noz n'eus kaoz nemet eus matchoù "polod euskarat"-. Gwir eo e oan en em gavet d'ar c'houlz-se, e kreiz ar "Mini-Mondial Polod Euskarat". N'eo ket dre o faot.

An animatour am eus gwelet a labour er C'hredit Agricole e-pad an deiz. Ha diouzh an noz : dav d'ar volotenn ! Evit displegañ ar matchoù rugbi e oa bet goulennet outañ dont. Met memestra eo. Ar pezh a gont eo bezañ un animatour yaouank o trevezif Michel Drucker. O trevezif ? Petra 'm eus laret ! Nann. Oc'h ober gwelloc'h ne laran ket. Dizale e vo goulennet outañ mont da labourat e-barzh R.T.L., moarvat !

Setu penaos e oa matchoù etre Euskariz an Hanternoz ha reoù ar C'hreizteiz : etre Bro-C'hall ha Bro-Spagn kea !

Ken pouezus e seblant bezañ ar matchoù-se ma oa bet dav lakaat dale gant ur c'hendiviz diwar-benn afer repuidi Euskadi ar Su. Ha c'hoazh, gouez d'hon animatour yaouank ne oa nemet dre vadelezn, ne oa ket bet lamet kuit an abadennoù. "Afer ar repuidi n'eo mat nemet da zigas reuz ha tabut". N'eo ket evel ar polod. A-drugarez d'ar radio nevez-se e c'hell a-benn ar fin an dud kollet e-barzh toulloù donañ o zraoniñ pe begoù uhelañ o menezioù heuliañ matchoù o sport kartañ.

A ! Disoñjal a raen. Eus-kareg 'zo war ar radio ur wech an amzer. Peurrest an amzer, 'm eus aon, 'vez leuniet gant ar c'hoari nevez ha dedennus meurbet: "Bataille Navale". H3, G5, B1 hag all...



Tangi Louarn

ar 'vignette'

ur stourm nevez ?

Gouzout a rit a-walc'h petra eo ar "vignette". Un tamm paper-peg da vezañ la-kaet ouzh gwerenn-araok ar c'hirri-tan, a ranker prenañ bep bloaz e penn kentañ ar goañv. Orin an anv-se eo ar ger "vigne" (gwinienn). E-kreiz ar XVvet kantved e veze graet gantañ da envel un doare kinkladur war bajennoù ul livr dre ma treveze an delioù gwini. Deuet eo da vezañ her-vez geriadur Larousse 1907, "un dresadennig e stumm un diketenn-beg" da larout eo e talv evit n'eus forzh peseurt tamm paper-peg. Hag en deiza-a-hiziv, dre ma kuzher a bep seurt traoù (vignette-auto, vignette Sec-Soc...) dindan an delioù gwini-se, ne vefe ket un dra vat ijinnañ ur poz evel "gwiniennig" e brezhoneg ! Tu 'vefe ober marteze gant "liketenn-garr" pe "dikedenn-garr" pe c'hoazh gant "timbr-karr".

Ne baein ket .

Gant Ramadier, ministr e-barzh gouarnamant sokialour (SFIO) Guy Mollet, an hini eo e voe ijinet ar "vignette" (lezenn an 30vet a viz Even 1956, dekred an 3vet a viz Gwengolo 1956, da zastum ar-c'hant evit ar re gozh dre ar "Fonds National de Solidari-

té"). Hogen ne oa ket sañset un dra da badout. 1 bloavezh nemetken, ar wech kentañ, 3 bloavezh an eil gwech. Abaoe, avat, eo deuet da vezañ un doare da rastellañ gwenneien war goust ar berc'henned kirri-tan. Da larout eo un taos evel ar re all. Ha disofijet ar re gozh !

An taos-se a baeen betek-hen, e-giz kement karr-taner fur ha sentus. An taos-se ne baein ket ar wech-mañ, ha goude, keit ha ne vo ket moulet ar baperenn-se e brezhoneg pe en div yezh, da nebeutañ. Ha da ziarbenn ar-guzennoù ar re a soñjo n'eo se nemet un digarez evidon da chom hep paeañ evel ar re all e roin ar pezh am bije dleet paeañ d'ar Stad, d'un "Ti ar Re Gozh" bennak, da larout eo, d'ar re o deus bet gouzañvet ar "simbol" pa oant er skol, d'ar re a zo bet mezhekaet hag heskinet en o yaouankiz. Digant an "Ti ar Re Gozh" e c'houlennin ur baperenn-diskarg divyezhek a begin e plas ar "vignette".

Petra a c'hoarvezo neuz ? Buan a-walc'h e vin harzet war an hent gant an archerien. Ar re-mañ a raio o labour, evel 'zo dleet. An telloù-kastiz a zeuio war-lerc'h. Paeañ anezho ne rin ket. Marteze a-walc'h e vin kaset d'al Lez-Varn hag e



teuio an archerien adarre, da gefiañ ac'hanon an taol-se ? Gwellet 'vo. Mard eo ret ober evel Kembreiz a-benn kaout ar gwir d'ober gant hor yezh er vuhez foran, greomp evel Kembreiz !

Ur stourm arouezel

Ne fell ket din bezañ treuzkomprenet. An "timbr-karr" e brezhoneg n'eo ket ur pal drezañ e-unan. Ur stourm arouezel eo nemetken. Ul lodenn vihan, ur bazennig war-du an divyezhegezh. Met ret eo tapout krog un tu bennak. Kement-mañ da respont d'ar re a rebechfe din chom hep paeañ ar "vignette" dre ma n'eo ket e brezhoneg pa vefe ret, d'o soñj, nac'hañ anezhi penn-da-benn, hag a zalc'h da baeañ anezhi e galleg... (tud 'zo a oa a-enep d'ar chekennoù brezhonek o vezañ ma oa ret diskar ar gopitalouriezh da gentañ ha n'eo ket livañ anezhi e brezhoneg !). Reoù all a rebecho ouzhin ober "c'hoari an tu dehou" dre vont a-enep d'ar gouarnamant sokialour nevez. Koulskoude n'eo se tra met sevel a-du gant Fanch Mitterrand en doa skrivet e 1973 e-barzh "Le Poing et la Rose" a-zivout ar brezhoneg : "Reconnaître cette langue comme un fait culturel, conduit à l'accepter en tant que fait politique : cela vaut mieux que d'étouffer l'âme d'un peuple." Ar frazenn-mañ a gaver e digoradur danvez-lezenn Loeiz ar Peñseg bet sinet gant ar strollad sokialour en e bezh. Ne ra ar skrid-se meneg ebet, m'am eus lennet mat, eus divyezhekaat papiroù ofisiel a seurt gant ar "vignet-

te' pe an diskleriadur-tailhoù. Setu aze ur mennad-gwellaat da ginnig pa vo votet an danvez-lezenn-se. Met, ur wech c'hoazh, pevare e vo kinniget d'ar gannaded ?

Dre gas seurt stourmoù da benn, hini an timbr-karr-tan pe hini ar panelloù-lec'h, eo e vo lakaet tud ar gouarnamant nevez da bledif buanoc'h gant an testennoù bet savet ganto pa ne oant ket e penn an traoù.

Divyezhekaat papiroù ofisiel

En ur pennad-kaoz bet embannet e Armor-Magazine (Gouere-Eost 1981) e responte Jean Yves Le Drian, kannad P.S. An Oriant ne oa ket an divyezhegezh "la priorité des priorités de l'action publique". Hag e ouzhpenne : "Pour ne pas apparaître comme un gadget coûteux et dérisoire, le bilinguisme, ou plutôt la promotion des langues régionales dans notre vie publique, devrait être considéré comme l'aboutissement d'un processus qui passe par l'éducation et les médias." Gortoz ! Gortoz c'hoazh ! Gortoz pell, gortoz gwel ! Evidon-me, avat, ez eus bet gortozet a-walc'h. Ha mard eo al Lez-Varn ha, piv 'oar, an toull-bac'h, "aboutissement ar processus" evit ar re o devo nac'het tra pe dra evit hor yezh, spi am eus e vo tud o sevel da zifenn anezho ha d'ober evelto.

Herve ar Beg

(G.S. : ar re a fellfe dezho nac'hañ an "timbr-karr-tann", int ivez, a c'hell mont e darempred dre Skol An Emsav.)

M'HO PEUS C'HOANT
MONT E DAREMPRED
GANT SKOL AN EMSAV

M'HO PEUS C'HOANT GOUZOUT HIROC'H DIWAR-BENN
STOURMOU LIESSEURT, EMBANNADURIOU, STAJOU
SKOL AN EMSAV.

SKRIVIT DA : SKOL AN EMSAV
8 STRAED HOLCHE
35000 ROAZHON
PELLGOMZIT D'AN : 30.90.15.

Lennit al liamm

bremañ

here-du 1981

stagadenn da v-bremañ

nenn
8

Bep 2 viz e teu ingal "BREMAÑ" er maez.
BEP 2 VIZ e vez kavet 'barzh keleier e brezhoneg
aes ha bev diwar-benn buhez ha stourmoù Pobl Vreizh.

Bep 2 viz... N'eo ket trawalc'h.

Ur wir gazetenn a rankomp kaout bep miz,
bep pemzektez, bemdez...

Met evit-se eo ret kaout muioc'h
a voneiz vihan o tont ingal :

KOMANANTOÙ, setu ar pezh
zo dav kaout evit mont
pelloc'h BREMAÑ.

ADKOMANANTIT
HA KOMANANTIT
HO MIGNONED !!



UR C'HOMANANT evit netra ma kavit
5 KOMANANTER e-touez ho mignoned.
Kasit deomp atav ho komanant hiriv
an deiz ha p'ho pezo kavet 5 Komananter
all, kasit deomp :

120 Lur e lec'h 150 Lur 30 Lur ar c'homanant.

KOMANANTIT
HO
MIGNONED

ANV

CHOMLEC'H

komanant paet

ANV

CHOMLEC'H

komanant paet

ANV

CHOMLEC'H

komanant paet

ANV

CHOMLEC'H

komanant paet

ANV

CHOMLEC'H

komanant paet

LIJHIRI da 'Vremañ'

RESPONT D'AR PENNAD-SKRID

DIWAR-BENN S.P.V.

E-barzh pennadoù-kaoz graet gant BREMAN (niverenn 6-7) displeget o deus ar strolladoù sevenadurel ha politikel breizhat : CELIB, RTB, UDB, PSU, KAD hag all... o menozioù.

Un doare demokratel eo evit ur gelaouenn araokour. Met perak an diaoul e oa difennet da S.P.V., a zo ur strollad politikel disranner, displegañ e venozioù ivez ? E-lec'h an dra-se e oa ur pennad faltaziuz diwar e-benn.

'Barzh Skol An Emsav ha S.P.V. emañ ha setu perak en deus goulennet diganin Burev politikel S.P.V. reizhañ tout ar sotonioù skrivet 'barzh BREMAN gant R.I. Kloareg ha lavarout petra eo S.P.V. e gwirionez.

- Ar gevier da gentañ :

- 1) N'eo ket "GWENN HA DU" kelaouenn S.P.V. (bez e oa e-barzh, da skouer ur pennad a-enep da S.P.V. (unan all) hag a-enep ur republik breizhat).
- 2) Ne oa ket tud S.P.V. 'barzh "Devezh ar Vro 79" gwisket gant lifreoù droch : ne oa ket krouet S.P.V. en amzer-se.
- 3) E Plogo e oa bet graet traoù gant S.P.V. na oant ket glabousadegoù. Trugarekaet e oa bet S.P.V. gant J.M. KERLOC'H (dre ul lizher a zo ganeomp c'hoazh) evit e skoazell war an dachenn er stourm a-enep d'an archerien c'hall.
- 4) Na Pennad, na Delorme, na Mordrel n'int bet biskoazh 'barzh S.P.V.
- 5) N'omp ket 95 evit ar mare, na 94, na 96...

- Sotonioù ha traoù dizonest goude :

- 1) S.P.V. en deus sañset, "torret e fas d'un emsaver eus Brest". Perak en deus disofjet Kloareg lavarout eo Jean Le Guellec an hini oa an "emsaver"-se en deus gwerzhet e gamaladed eus an FLB hag en deus louzet anezho e-barzh pennadoù 'barzh "LE PEUPLE BRETON" just e-pad o frosez ? Etre an disrannerien hag an dreitourien R.I. Kloareg en deus dibabet e blas.
- 2) S.P.V. en deus displeget

e venozioù dre ur "PLATEFORME REPUBLICAINE BRETONNE". La-kaat a ran anezho berr ha berr.

S.P.V. a stourm evit pennroueelezh Pobl Vreizh.

* Pennroueelezh politikel : ur republik evit Breizh.

* Pennroueelezh ekonomikel : sokialouriezh e Breizh.

3) Muioc'h evit an hanter eus arroudennoù R.I. Kloareg ne zeu ket eus skridoù S.P.V.. Dont a reont eus skridoù strolladoù marv pell zo dija ha ne ran ket fouter anezho.

Ha perak eo bet berret an traoù a zeu eus S.P.V. ? Ur skouer : "Il ne saurait y avoir de libération nationale sans libération sociale. Le S.P.V. se prononce donc pour une société bretonne dégagée de toute hégémonie étrangère qu'elle soit française ou qu'elle se rattache à l'impérialisme quelconque".

Perak eo bet disofjet pezh a zeu da heul :

"Une telle révolution nous apprend à ne pas nier que la lutte des classes soit une réalité et que le système capitaliste, défini comme la dictature des moyens de production, soit une objection..."

Ha goude : "... nous nous rattachons au courant socialiste révolutionnaire."

Tagañ S.P.V. dre an dud a zo bremañ ba S.P.V. hag a oa 'barzh an tu dehou gwechall, (n'eus ket kalz anezho), a zo en em ziskouez izel-kenañ.

Petra zo pouezusoc'h a-benn ar fin : menozioù ar re yaouank pe oc'h emzalc'h goude ?

Bakounin 'oa kloareg (Stalin ivez).

Mitterrand 'oa roueeler pa oa yaouank.

Yann Daumer 'oa "Gaul-liste" gwechall.

Mussolini oa sokialour a-raok krouiñ ar faskouriezh.

Ha te R.I. Kloareg ? Piv out ? Petra eo da anv gwir ?

Deus pelec'h e teuez ? Ne skrives ket evel ur micherour...

Hag a-benn ar fin "à qui profite le crime ?" e-giz ma 'vez lavaret e galleg ?

Pas d'an Emsav. A-raok S.P.V. ne oa strollad politikel ebet a oa sklaer evit an

dizalc'h. S.P.V. ne gemer ket plas ur strollad all.

Setu, evit piv e labour an Ao. Kloareg ? Pas evit ar wirionez forzh penaos...

Maz eus "des militants bretons" (evit petra : "régionalisation" ? "droit à la différence") evelvoud R.I. Kloareg, tud a blij dezho kaozeal diwar-benn Breizh, kendalc'hit da gaozeal. Met laoskit an dud a fell dezho stourm evit Breizh da labourat.

Un dra a faot din gouzout. Ha posubl eo bezañ disranner ha 'barzh S.A.E. war un dro ?

Yoran Delacourt emsaver
29. Fouesnant

UR STATUD EVIT HOR YEZH

Stourmerien ger,
Setu aze chekenn ma c'homanant-skoazell 'vit ma vo miziek, an abretañ ar gwellañ, ho kelaouenn. Kalz a dra 'zo da laret diwar hor bro, neketa ?

Kalz a dra a chom da ober ivez evit he yezh. Diskouezet eo bet e-barzh "Bremañ" ez eus tud c'hoazh hag a gred stourm eviti hep mezh ebet, quell a-se ! Bremañ a zo skrivet en ur brezhoneg eeun a-walc'h, aes a-walc'h da lenn. Kendalc'hit evel-se.

Poent eo kaout abadennoù modern o tennañ d'ar vuhez a-vremañ 'barzh ar postoù, ha n'eo ket teir gwech, pe ouzhpenn a-wechou, ar memes abadenn, dister alies ha paour ar brezhoneg en-enni. Ober goap a-walc'h a zo bet graet ouz ar Vretoned, chañchomp tu d'ar vash ha goulennomp digant ar Stad nevez ur gwir statud evit hor yezh."

J. L. Kerdoncuff. Brest.

CHOM HEP PAEÑ AN TAILHOÙ

"Lennet 'm eus an div bajenn gant Herve ar Beg diwar-benn dazont ar brezhoneg.

En em c'houlenn a ran penaos ober evit dedennañ an dud gant ar stourm evit hon yezh.

Un dra zo sur, ma vijen bet o chom e Breizh, ha ma 'mije bet bugale e Skol Diwan, ne 'mije ket paet ma zailhoù ken. Skrivet 'mije ul

lizher d'an tailhanter evit diskleriañ dezhañ em eus c'hoant sevel ma bugale e brezhoneg, eus ar skol-vamm betek ar skol-veur. Skrivet 'mije c'hoazh e yafe ma ar-c'hant da baeñ kelennerien Diwan. Ret e vije din ober bruderezh war un dro o skrivañ d'ar c'helaouennoù pa grogfe ar reuz gant ar justis.

Gouzout a ran mat eo aes-tre laret, met soñjit 'ta, ma rafe an holl dud eus Diwan memes mod...

Martez e vo ret ober mod-se ma ne vez ket votet lezenn ar Peñseg a-benn miz Herve pe miz Du.

Fiziañs 'm eus memestra e vo votet al lezenn-se."

Y. Bordieç. Paris.

- Sur eo ne vo ket votet lezenn ar Peñseg e 1981. Den ne eo pegoulz e vo kaoz anezhi e-barzh ar Gambre e Paris.

N'omp ket sur e vefe kalz tud prest da nac'h paeñ o zailhoù, ken nebeut a oa ha ne baent ket o skodenn-skinwel.

E Kembre, ar bloaz-mañ, ez eus bet mammoù oc'h aloubiñ ur skol noz-deiz evit ma vefe kelennet kembraeg d'o bugale. Kredif a raent e oa naturel kaout kembraeg er skol, hag e oa naturel stourm pa ne veze ket. Gounezet o deus

E-barzh ar skolioù, e Breizh, n'hon eus graet netra evit c'hoazh.

"Bremañ a blij din atav. En abeg da se e komanant an a-raze.

Gwelet em eus ar pennad 'Skrivet e-barzh' war ar bajenn divyezhañ, ha kas a ran deoc'h ur pennadig.

Buhez hir da Vremañ."

Y. Guégan. Massy (91).

- Trugarez evit ar pennad ... hag ar c'homanant. Bremañ a vevo ma teu deomp komananterien nevez. Sikour an holl zo ezhomm.

Ezhomm hon eus ivez gouzout ar pezh a soñj al lenne-rien a-benn klask gwellaat ar gazetenn.



Penaos 'mañ kont gant "AR FALZ"

Dalc'het eo bet bodadeg veur strollad AR FALZ e Loktudi, d'ar 6 a viz Gwengolo, gant un hanter-kant bennak a dud ; daoust ha ma ne oa ket niverus an izili deuet d'an emvod, ez eo bet bev-mat an divizoù.

Displeget en brezhoneg gant ar sekretou Paolig Kombat, danevell an oberiantizoù a lakaas war wel perzhioù fall ha perzhioù mat stourm ar bloavezh tremenet.

Bruderezh mat a zo bet graet d'ar strollad gant embannadurioù Skol Vreizh, en o zouez pedervet lodenn Istor Breizh ha metod brezhonek Andreu Korneg war daolenn feltr (Liorzh ar brezhoneg) ; ar gelaouenn vrezhonek Plane-denn he deus kendalc'het da vezañ embannet ingal, daoust ma 'z eo bet nac'het reifañ zhi un niverenn CPPAP. Ar stourm evit hon sevenadur -



araok ha warlerc'h miz Mae - a zo bet kendeuzet e-barzh heni an Talbenn Sevenadurel, bet renet ar bloaz-mañ c'hoazh gant Ar Falz. En desped da se, ez eo arabat nac'hañ ez eus bet un nebeud diaesterioù : n'eo ket deuet er-maez ingal kelaouenn Ar Falz, nebeutoc'h a dud o deus darempredet staj Loktudi, re a gargoù a bouez war choug ar memes re. Evurusamant ez eo yac'h stad an arc'hant, evel ma 'z eo bet displeget gant an teñzorour, Daniel Gilles.

Diouzh an endervezh e voe digemeret pevar mennad :
- Unan o c'hourc'hemenn e vefe goulennet digant an dud, da-geñver niveridigezh miz C'hwevrer 1982, pesort yezh "rannvroel" e komzont ;
- Unan all o c'houlenn e vefe adstaget al Liger Atlantel ouzh Breizh ;
- An daou all diwar-benn an

deskadurezh : goulenn a ra Ar Falz e vefe krouet postoù kelennerion war ar brezhoneg, skolaerien o vont d'ur skol d'eben, hag e vefe, evit ar brezhoneg, ar memes arnodenoù hag evit an danveziou all.

Evit pezh a sell prizovididi bolitikel Bro-Iwerzhon, e vo kaset lizhiri da Simone Veil, Margaret Thatcher, ha da rener republik Bro-Iwerzhon.

Skol Vreizh, diouzh he zu, ne chomo ket dilabour, peogwir emañ o vonet da embann ur metod brezhonek nevez, heni Jos Korbel, hag ul levr diwar-benn ar sevel tier war ar maez.

E penn strollad Ar Falz, ez eo bet miret ar memes skipailh-ren ha warlene. N'eo ket achu ar stourm, daoust d'ar cheñchamant !

keloù laouen ar gelaouenn. keloù laouen ar gelaouenn.

Ret eo lenn e-pad an hañv. En un "Nouvelobs" eus miz Eost hon eus kavet ar gerioù-mañ, gant ur François Cavanaugh : "Jakobin on, ken ez on. Ne fell ket din e ve dieubet Breizh, hag ouzhpenn e fell din e ve aloubet ganimp Monaco, Bro-Suis ha Bro-Beljik". Ha Bro-Aljeri ?

Ar saozon o deus keuz d'an amzer ma aloubet Akwitania gozh. C'hoant zo gante teurel o lastez nukleel e Foz Capbreton. Ar c'hallaoued a daol a-walc'h o breinadur e-tal Jersey.

Degemeret eo bet izili an Talbenn Sevenadurel Araogour gant Bernard POIGNANT, Jean PEUZIAT, ha BEAUFORT (deputeed P.S.) d'al Lun 15 a viz Gwengolo e-pad emvod ar C'huzul-Rannvro e Roazhon. Divizet e vo e-pad kendalc'h a zeu ar P.S. (miz Here pe miz Du) e piv e vo fiziet adstudiañ ha kinnig ar pezh a oa betek-bremañ "Danvez-lezenn ar PENSEG". Ma vo cheñchet, ra vo evit gwellaat !

DOUR VITTEL : DIAES DA LONKAN

Feunteun Bagatz, e-tal Gwichen, zo o vont da serrif. Feurmet e oa d'an S.G.E.M.V. kevredigezh dour Vittel, gant ar perc'henn an Aotrou De Talhouet.

26 den 'zo o labourat aze o lakaat an dour e boutailhoù, pa oa 38 a dud daou vloaz 'zo. Ar gompagnunezh a ginnig d'ar 26-se mont da labourat e... Vittel, e departamant ar Vojou (Vosges).

Emañ an S.G.E.M.V. oc'h ober war-dro dour Bagatz abaoe 1973, hag ar bloavezh-e e veze gwerzhet 12 milion a voutailhadoù. Diwar neuze eo aet ar werzh war zigreskiñ. Hiziv ne vez gwerzhet nemet 4 milion hanter.

Hervez ar C.F.D.T. he deus klasket an S.G.E.M.V. mougañ ar gevezerezh. Tamm bruderezh ebet evit an dour-se (e-skoaz an hini vez graet da anv Vittel). Gweneg ebet evit gwellaat ar mekanikou-labour. Pa ouezer e vo savet e Roazhon ur greizenn dour Vittel e 1982...

Ha pa ouezer e koust ke-roc'h dour Vittel d'ar Vretoned eget dour o bro.

Mister K.

Owen Carron, dilennet evel kannad Norz-Iwerzhon goude marv Bobby Sands, a vo e Breizh e-pad ar goañv. Pedet eo bet gant ar PCF. Hervez ar strollad-se e vefe "Liammoù ispisial etre Breizh hag Iwerzhon". Pere 'ta ?

N'eo ket a-walc'h klevout Maria Prat o tistagañ he "barzhoneg" "O brezhoneg yezh kaer ma bro", ret eo lenn e-pad an hañv. E levr "Les Rus-koffs", gant François Cavanaugh e kaver : "N'eus ket bravoc'h yezh er bed eget ar galleg... nemet marteze ar rusianeg". Gant gerioù don evel-se ec'h anavezer un intelektual parizian eus an tu-kleiz diouzh un Dregeriadez kozh.

Klevet ivez e-pad ar memes emvod :

Ur respont zo bet graet gant an Aotrou SAVARY, Ministr an Deskadurezh, d'an Aotrou JAGORET depute ha maer Lannou diwar-benn DIWAN : seblantout a rafe diaes d'ar ministr lakaat Diwan en Deskadurezh ofisiel bremañ. Met prest eo da studiañ ar gudenn. Ha goulennet en deus ouzh ar Rektor kas dezhañ un danevell diwar-benn Diwan. Da c'hortoz emañ Jean PEUZIAT o labourat a-zevri war an dossier.

E "Kuzul ar (Rann-)Vro" emañ ar Sokialourien hag ar Gomounourien a-du gant Naoned e Breizh. E Kuzul Broioù al Liger e laront n'eo ket "prioritaire" (sic). Gaston Deferre n'eo ket a-du da adframmañ ar rannvroioù.

CGT-EDF a c'houlenn ur greizenn nukleel e Penn ar Bed.

Paperenn-vruderezh "Kuzul ar (Rann-)Vro" diwar-benn ar c'helenn brezhonek en deus koustet 14 milion kozh. Ar skrid brezhonek zo warni oa bet savet da gentañ e peurunvan. Met moulet en Assimileg.

UL LISANS A ZO ..



AN TREC'H

D'an 22 a viz Gouere ez eo deut Ch. Josselin, gantañ pevar c'hannad all, da ziskleriañ er skinwel e oa bet roet da Skol-Veur Breizh-Uhel, Roazhon, gant an Ao. Savary, an "aotre da reif ul lisañs hag ur vestroniezh brezhonek ha keltiek."

Deut oa an trec'h ga-neomp !

Deut an trec'h... ya... met n'eo ket hep ur stourmadeg kalet. Ni 'soñje deomp, goude trec'h Mitterrand, goude trec'h ar sokialourien, e vije bet diskouezet en hor c'heñver un tamm madelezh, un tamm justiz. Ni 'soñje deomp e vije bet roet diouzhtu, hep ober reuz, a galon laouen, ar pezh a veze goulennet en araok, hag en aner, digant gouarnamant Giscard. Blev ! Ken kaledet ha biskoazh eo chomet burevierien ha renerien Pariz. Dav eo bet dezho plegañ, a-benn ar fin... Met tenn eo bet ar stourm.

A-ENEP D'AL

LISAÑS !

Gwashañ 'zo, pa oamp o stourm ken kalet, ez eus bet en em gvet tud e Breizh evit sevel a-enep deomp - a-enep d'al lisañs. Tud o tont endro gant randonezh drouk ha sot ministred Giscard. Ar re vrayañ tout eo bet re FEN-29 - pe da nebutañ an hini a oa gantañ paper-lizher FEN-29. Daou zevezh a-raok na vije deut Ch. Josselin da lavarout e oa roet deomp ar pezh a oa nac'het abaoe keit all gant Giscard, gant Pompi-

dou, hag gant ar re all, setu an abostoled-se oc'h embann ur mell pennad da zisplegañ na oa ket mat reif al lisañs, e oa traoù kalz gwelloc'h da ober, traoù kalz pouezusoc'h... Un dra fentus a oa displeget en o fennad : int a lavare e oa bet dija a-du gant ar Chart ar re a oa bremañ a-du gant al lisañs. Me a oa er C.E.S. (Komite Ekonomik ha Sokial) pa'z eus bet votet diwar-benn ar Chart. N'eus bet nemet ur vouezh a-enep : ma hini. Ha koulskoude e oa e-barzh ar C.E.S. un den a-berzh ar FEN hag un all a-berzh ar C.G.T.. (bravoc'h a zo bet graet gant FEN-29 abaoe : aet int da welout ar rektor evit goulenn skoazell hag arc'hant evit... lisañs anglo-keltiek Brest. Netra evit Roazhon !...)

EN EM ENSKRIVAN

Ul lisañs, neuze, a zo. Me 'oar e vo kalz tud o tont da Skol-Veur Breizh-Uhel da dapout an diplom-se. Ret eo, bremañ, gouzout kement-mañ : al lisañs a zo un diplom trede bloavezh. Evit bezañ aotreet d'en em ginnig evit al lisañs, e ranker bezañ en unan eus an tri rummad-mañ :
- 1. Rummad an dud o deus bet un DEUG.
- 2. Rummad an dud o deus bet diplomoù skol-veur all.
- 3. Rummad an dud a zo ganto ur vicher abaoe pemp bloaz da nebutañ.

A-wechoù e vo ret tremen un tamm arnodenn. Forzh pe-

naos, ar re o defe c'hoant da vezañ degemeret da labourat evit tremen al lisañs a rank skrivañ ar c'hentañ ar gwellañ da Renerez Servijoù ar Sclarité, Skol-Veur Breizh-Uhel, Bali Gaston Berger, Rennes Villejean. Ret eo dezho displegañ en un doare sklaer ha resis penaos emañ kont ganto. Respontet 'vo dezho. Teurel evezh : goude an 31 a viz Here ne vo ket mui tu d'en em enskrivañ er Skol-Veur. Echu e vo. Ha klozet da vat.

HAG AR POSTOU

KELENNERIE ?

Ur mignon din, hag a ya alies a-walc'h da Bariz da welout an uhelidi a zo o ren ac'hanomp, a lavare din kement-mañ an deiz all : "Bez emaint o c'hortoz ac'hanout er c'horn-tro..." Forzh penaos me 'blij din gwelloc'h al lisennoù eeun, hep korn-troioù. Lavarout a reont : "petra 'vo graet gant ar re o devo al lisañs brezhonek-se ? Kalz gwelloc'h eo lisañs anglo-keltiek Brest..." Talvout a

Skol-Veur Breizh-Uhel he deus bet an aotre da reif ul lisañs brezhonek. Setu amañ piv a zo aotreet d'en em enskrivañ evit al lisañs.

1. Ar re o deus bet an DEUG, goude ma vo bet studiet o zeuliad Skol-Veur ;
2. Ar re o deus bet diplomoù Skol-Veur estreget an DEUG, goude ma vo bet studiet o zeuliad ha ma vint bet goulennataet war ar pezh a anavezont ;
3. Ar re a zo ganto ur vicher abaoe pemp bloaz da nebutañ, goude ma vint deut da dremen un arnodenn a-ratozh a-benn bezañ dieubet diouzh kaout an DEUG.

An dud a zo e soñj en em enskrivañ a rank kas ur goulenn dre skrid da "Sclarité 2ème cycle, Université de Haute Bretagne, avenue Gaston Berger, 35043 Rennes-Cedex". Klozet e vo an enskrivadurioù da vat d'an 31 a viz Here.

ra ar boan prederiañ war gement-se. Da gentañ, ma oa hor renerien kement-se a-du gant l'isañs anglo-keltiek Brest, perak n'o deus ket roet anezhi diouzhtu ? N'eo bet roet ken d'ar vunutenn diwezhañ, goude ma vefe aet un den eus Brest d'ober trouz da Savary, ha pellik goude an asant roet da Roazhon. Ouzhpenn-se, tapet en doa Roazhon kaout un

ali "a-du" a-berzh ar CNESER (Kuzul Broadel an Deskadurezh Uhel hag an Enklaskerezh), un ali a-enep a oa bet roet gant ar CNESER evit lisañs anglo-keltiek Brest. Ouzhpenn-se, an tamm kentañ eus an evezhadenn graet ganto a ziskouez daou dra. Da gentañ, ne lennont ket ar paperioù a vez kaset dezho, rak atav am eus lavaret e vefe gounezet gant ar studierien ul lisañs all ivez - saoznek, spagnolek, gallek, douaroniezh, ha me oar - diouzh an DEUG a vije bet ganto. Goues e vefent eta da gelenn un dra all eget ar brezhoneg. Ken nemet gant un DEUG all vefent gouest da gelenn un dra all. Gwashoc'h a zo avat : o doare da gomz a ziskouez n'emaint ket e soñj krouiñ postoù kelennerien war ar brezhoneg. N'eo ket deut c'hoazh en o spered e tevio kelennadurezh ar brezhoneg da vezañ ur gelennadurezh evel ar re all. Me soñj din e vo ret stourm kalet ha taer evit lakaat "anezho" da gompren an dra-se. Un dra a zo bet lavaret nevez 'zo gant an Ao. Savary - a c'hell bezañ mat-tre, pe fall-tre. Lavaret en deus eo ret soñjal ivez er "sevenadur rannvroel" ha n'eo ket er "yezh" hepken. Mat-tre : ma teu ar c'hente-lioù war ar Sevenadurezh ouzhpenn ar re war ar yezh. Da ziwall a zo avat na vefe klasket lakaat anezho en o flas.

PETRA OBER ?

Bremañ, setu penaos e welan ar stourm war dachenn ar "gelennadurezh-uhel".

1. Ret eo lakaat kalz tud d'en em enskrivañ evit al lisañs, e doare ma vo gwellaet kelennadurezh ar brezhoneg er skolioù, ha ma vo roet an tu da gelennerien nevez da zeskiñ o micher.

2. Ret eo lakaat al liseidi ha kolejianed da c'houlenn start klasoù brezhonek.

3. Ret e vo stourm evit ma vo kresket kevrenn geltiek Skol-Veur Breizh-Uhel, Roazhon.

Hag a-benn bremañ eo ret soñjal en dra all-mañ : pe hini e vo hor c'hammed kentañ ? Morse ne chomo ar stourm a-sav...

Un dra evit echuiñ : aesoc'h e vo gounezet an traoù pa vo un emglev start etre studierien, kelennerien ha stourmerien evit ar yezh. Etre an holl.

Per Denez

AL LISANS, HA BREMAN ?

"Gonezet" al Lisans Brezhonek.

Ha laouen ur bern tud. Un tammig evel goude ar chekennoù brezhonek.

Koulskoude, pet a dud o deus stourmet evit-se ? Estroc'h evit gant pennadoù er c'hazetennoù da c'houde, a fell din larout.

Ar sindikadoù kelennerien ? FEN 29 oa enep. SGEN-CFDT Breizh a lare a-raok e gendalc'h ne oa ket tu dezhe stourm evit al lisans.

Ar strolladoù politikel ? Ar PCF oa enep. Ar PS, PSU, r'o deus graet netra. UDB n'he deus ket fiñvet kalz.

Din da c'houzout, n'hall an trec'h-se bezañ lakaet nemet war gont (un nebeud) tud, eus Kevrenn Geltiek Skol-Veur Roazhon hag eus aozadurioù sevenadurel zo, o deus skrivet lizhiri, manifestet e kêr, skignet traktoù ha pouezet war ar PS.

Met marteze n'eo bet gouezet an trec'h-se nemet ablamour d'an degouezh politikel. Ret oa d'ar gouarnamant nevez ober e draig distret evit hor yezh, kement ha diskouez oa un tamm cheñchamant er vro, met n'eo ket sur e vefe en sell da vont pelloc'h (ha ni ? Hag-efi emamp en sell da vont pelloc'h ?) pa weler pegement a boan en deus bet o reif dimp hon aotreegezh.

Pouezh eo eveljust e vefe anavezet (war ar paper) eo ar brezhoneg ur yezh "par" d'ar saozneg pe d'an alamaneg. Met petra zo vont da cheñch er skolioù ? Kelennerien a vo ar bloaz-mañ war ar brezhoneg, evel war ar saozneg ? E 1980 e klemme an FCPB (ar PS zo e-barzh) ablamour da stad lous ar c'helenn brezhoneg er skolioù (eurioù, h.a.). Met n'eus netra nevez ar bloaz-mañ.

Hag er skol-veur ? Goude ar vachelouriezh e c'haller mont war an DEUG saoznek (2 vloaz) ha goude-se war an aotreegezh saoznek (1 bloaz). Se n'eo ket posubl evit ar brezhoneg. Ret eo kaout un DEUG (forzh petra) a-raok mont war an aotreegezh, peogwir n'eus DEUG brezhonek ebet.

Ar bloaz-mañ e c'hallo ar studierien ober trouz adarre evit goulen an DEUG-se.

Met n'eo ket gantañ c'hoazh e vo postoù-kelenn. Ha se eo a gont e gwirionez.

Labour zo d'ober a-benn tizhout ar pal-se. Ma fell deomp e ve kelennet brezhoneg d'hon bugale er skol un deiz... Met daoust ha fellout a ra deomp ?

L.M.

TI-KRAMPOUEZH

BAR

«chez tom»

18, stradaed an Itron Varia
29260 LESNEVEN
83.15.14



AR GWIR DA GOMZ UR YEZH DISHENVEL EUS AR GALLEG

Bruderezh unan eus an danvez-prezidanted evit Bro-Elzas, en alamaneg.

(Small text in German, likely a translation or commentary on the main article.)

(Small text in German, likely a signature or note.)

(Small text in German, likely a signature.)

Francois Mitterrand.



(Small text in German, likely a caption or note.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)

(Small text in German, likely a signature.)



Bloaz goude an "Amoco Cadiz", d'an 29 a viz Ebrel 1979 ez eas d'ar strad ar Gino, ur vatimant italian war-lerc'h vije deut a-benn dezhi ur vatimant norvejian all, nepell diouzh enez Eusa. Karget edo ar Gino gant 400 000 tonenn a goltar anvet "carbon black oil". Al loustoni e foñs ar mor, dañjer ebet evit an douristelezh, setu n'eo ket bet klasket ober seurt ebet abaoe evit he dastum endro. Ledet eo bremañ ar moc'hach war ouzhpenn 22 zervezh-arat. Ar c'hregin Sant

Jakez 'zo en arvar. Gwashoc'h c'hoazh : dre ma 'z a ar c'holtar etrezek ar c'hreisteiz e c'hellje en em gavout e donvor Penmarc'h e lec'h ma teu kalz a besketourien eus ar vro da strinkañ o rouejoù. Met gouezet 'vo hiroc'h marteze pa vo deut endro ar C'h/Cryos, bag ar Cnexo, a zo aet n'eus ket pell da sellout pishoc'h ouzhal loened hag ar plant bet kontammet. Ur vezh eo met moarvat e chomo ar c'hozh moc'hach daonet-se er strad.

Y-F KERNEIS

Es lebe die Republik,
Es lebe Frankreich.

gant RENE TREGER euz


Peur ha penaos eo bet savet Strollad C'hoariva Plougin ?

C'hwec'h pe seizh vloaz 'zo eo bet savet ar strollad. Savet eo bet gant re yaouank Plougin hag o doa c'hoant ober c'hoariva. An dra-se 'oa e diabarzh Ti ar re Yaouank a oa bet adkroget gant ur rummad nevez. Ar bloavezh kentañ o deus c'hoariet e galleg. Goude-se ez eus bet deut unan eus Brest, Kervern, a oa animatour er P.A.C., da sikour ac'hanomp. Eñ eo en deus lakaet ar strollad da vont war ar brezhoneg : d'ar poent-se eo ivez ez eus bet brezhonegerien o tont 'barzh ar strollad. Ar bloaz-se eo bet c'hoariet "Hon tud kozh" hag a oa un istor skrivet e brezhoneg gant un den a oa bet person e Plougin : kontañ a rae amzer an Dispac'h.

Goude-se hon eus c'hoariet ur pezh a gonte ar jeu a oa bet etre peizanted e Bro-Maoritani. Aze on aet 'barzh ar strollad. Ar pezh-c'hoari a oa bet degaset gant Kervern, c'hoariet edo bet gantañ e Brest met e galleg ha lakaet en doa Frañsez Favereau da dreñf anezhañ e brezhoneg. Anv ar pezh 'oa "Pa gresko an tan" (e galleg "La colère de Baba"). Pleustret hon eus warnañ met n'eo ket bet c'hoariet kalz.

E fin 1977 hon eus kroget da bleustrif war "Danjerus ? Tamm ebet !" D'ar poent-se, Kervern ne c'helle ket dont ken, setu edomp hon unan. Aze hon doa klasket kreskiñ ar strollad un tam-mig. E penn-kentañ e oa bet deut ar soñj deomp d'ober ur pezh diwar an adlodennañ peogwir e Plougin e oa bet trouz, ha trouz bras memes e karterioù 'zo, abalamour dase. 'Pad ur pennad edomp etre an daou : meskiñ a raemp memes an adlodennañ hag an nukleel 'barzh ar pezh. Mikael Madeg a zeue da welout ac'hanomp ivez hag en deus kroget da skrivañ, 'mod-se, hep larout netra deomp. Kavet e oa bet mat 'pezh oa bet skrivet hag edomp aet war an dra-se. 'Pad ar bloavezh-skol hon eus pleustret war ar pezh en ur gempenn anezhañ a-nebeudoù. C'hoariet eo bet ar pezh evit ar wech kentañ e miz Even 1978 hag abaoe eo bet tost da dregont gwech.

War-lerc'h, dre ma 'z eus leun a labourerien-douar 'barzh ar strollad, hon eus savet ur pezh diwar al labour-douar. Ar pezh-se 'zo bet savet ganeomp muioc'h eget an hini all. Rozen Milin eo he deus skrivet ar pep brasañ outañ : lakaet he deus dre skrid ar menozioù a zeue ganeomp. C'hoariet eo bet war-dro 25 gwech.



Perak 'peus bet c'hoariet e galleg da gentañ ?

Er penn kentañ eo bet krouet ar strollad gant Ti ar re Yaouank hag a oa ennañ tud ar bourk dre vras. En o zouez ne oa ket a vrezhonegerien memes ma oa unan pe zaou a gomprens brezhoneg. Goude-se, ur wech aet war ar brezhoneg, n'omp ket deut war-gil. Kendalc'het hon eus gant ar brezhoneg. Da heul, ez eus bet ivez 'pad ur pennad kentelioù brezhonek. An darn vrasañ eus ar re a zo o c'hoari bremañ n'o dije ket c'hoariet 'barzh ur strollad a raje c'hoariva e galleg, 'gav ket din.

Hag ar re a zo o c'hoari bremañ, penaos o deus desket brezhoneg ?

Tout anezho o doa klevet brezhoneg forzh penaos peogwir emaint o chom war atantoù evit an darn vrasañ. Lod o deus desket brezhoneg 'pad ar c'hentelioù e Plougin, lod all war an dachenn pe er skol. Tamm ha tamm e teue gwelloc'h gwellañ ganeomp en ur c'hoari. Met ne chom ket atav ar memes re o c'hoari, setu 'vo ret atav ober al labour.

Penaos oc'h bet degemeret gant an dud a zeue da welout ac'hanoc'h ? Kalz a dud a oa ?

Bez 'z eus bet 30 'giz 200 pe 500, met dre vras war dro 100. Met evit c'hoari, pa n'eus nemet 100 'barzh ur sal vras ez eo fall, ne vez ket gwelet an dud, n'eus liamm ebet etre ar re a zo o sel-lout hag ar re a zo o c'hoari. Pa 'vez tout an dud, kozh ha yaouank, e vez aesoc'h eget pa vez nemet "stourmerien". Dre vras omp bet degemeret mat, koulz gant ar re yaouank ha gant ar re gozh. Ar re yaouank 'vez alies 'barzh an taol dija, a-du int gant 'pezh a leveromp. Ar re gozh, dre m'o deus tro da welout re yaouank o kaozcal brezhoneg, 'vez plijet ivez.

Hag amañ e Plougin penaos oc'h bet degemeret ?

Er penn kentañ e oa kalz a dud o tont da welout ar pezhioù c'hoari, 'pad ur pennad e oa kalz nebeutoc'h met bremañ eo krog en-dro an dud da zont. Er penn kentañ, douetus, edo re yaouank Plougin hag an dra-se a zegase ar gerent, ar familh, an amezeien, ur gouel edo, un dra nevez. Met bremañ ez eus kalz nebeutoc'h a dud eus ar gomun o c'hoari 'barzh ar strollad.

Petra glaskit dre ho pezhioù-c'hoari : dudiañ an dud, embann ha brudañ menozioù... ?



STROLLAD gant Y-F. KERNEIS

C'HOARIVA PLOUGIN

An dra-se 'zo mesket. Evel just ez eus menozioù 'barzh ar pezhioù, ur menoz kreiz pe zaou 'zo bep tro : an nukleel hag ar politike-rezh 'barzh "Dañjerus ? Tamm ebet !", an divroañ hag al labour-douar 'barzh "Loen blein pe marc'h limon". Re bout 'vije displegañ an traoù mod-se ; setu en ur farsal, a bep an amzer an dud a vez 'barzh an taol. Aze 'z eus tu da lavarout traoù 'zo, dezho.

Daoust ha darempredoù 'peus gant ar strolladoù all a ra c'hoariva e brezhoneg ?

Ya, dreist holl gant Strollad ar Vro Bagan. Stajoù hon eus bet heuliet asambles. Pedet omp bet da c'hoari gant Strollad Karaez ha pedet hon eus anezho da zont amañ war-lerc'h e-giz gant Strollad ar Vro Bagan. Darempredoù hon eus ivez gant animatourien ar strolladoù a ra c'hoariva e galleg : unan hag a ra wardro an ADEC 'zo bet deut amañ. Pedet omp bet ivez d'ur festival a zo bet e Roazhon n'eus ket pell met n'hon eus ket gellet mont.


Penaos e velez amzer da zont ar strollad ?

Aze 'maomp o klask sevel ur pezh all war an trede bed met n'ez a ket gwall vuan. Bremañ emañ tout an dud o labourat e skoaz er penn kentañ edomp studierien dre vras. Fiziañs 'm eus e vimp prest da c'hoari ar pezh nevez a-benn miz Even a zeu. Amzer a vank deomp, kemeret 'vezomp a gleiz hag a zehou.

Te gav dit ez eus bet ul levezon bennak e spered an dud diwar ho pezhioù c'hoari, war an nukleel pe war al labour-douar ... ?

Diaes eo lavarout pe-gwir ouzhpenn ac'hanomp o deus stourmet war dachenn an nukleel. Marteze e lavaromp uhel ar pezh a soñj meur a hini pe 'pezh ne gred ket lavarout lod. An dra-se a c'hell kaout pouez ur miz war-lerc'h 'giz dek vloaz war-lerc'h.

Embannet 'zo bet daou bezh c'hoari bet c'hoariet gant ar strollad :
- Dañjerus ? Tamm ebet ! e Brud Nevez Nn 14.
- Loen blein pe marc'h limon e Planedenn Nn 2.



LOAN BLEIN PE MARC'H LIMON gant strollad plouguin

BOMBEZENN N... EVEZ

Goude gwelout Fañch Mitt' o vont da enorifi listri-spluj nukleel en Enez Hir, e c'hallomp bezañ laouen o welout ar bruderezh graet gant West-Torch da gazarn Ti-Voujeret, modernañ hini Europa mar plij, da benn-kentañ ar bloavezh-skol. 20.000 a weladennerien, hervez. Labour d'ar Vretoned en armeoù, lec'h sioul ha dizañjer, a-benn ma krogo an Abadenn-Veur. Rak bremañ er brezelioù, n'eo ket ar re a daol bombez a resev anezhe war o fennoù. Plijadur !

Ha plijadur ganeomp. Klevout Reagan embann, evit 35vet deiz-ha-bloaz bombez Nagasaki hag Hiroshima, e krogfe dizale an USA da ober bombez neutronek.

An URSS hag an USA ne gredent ket ober brezel an eil d'egile, abaoe 1944, ken kreñv oant o-daou gant o bombezenn H. Met ar vombezenn N, a laz an dud hep distruj na tiez na binvioù, a c'hall talvezout da lakaat tud all d'en em gannañ evite. Ar re a sello hag ar re a'n em ganno.

Evit Brejnev, Polska pe RDA zo proviñsoù, tra ken. Evit Haig a zeu da Verlin, emañ en ur gêr amerikan. Hag isañ an dud d'ar brezel ! Ha godisañ ar re a c'houlenn peoc'h !

Pa gouezho ar bombez, e kouezhint war al lec'hioù dalc'het gant ar soudarded. Ha tro-war-dro. Gwall-dost emañ kerioù Brest, Kastellin, Kemper ouzh an Enez-Hir ha Ti-Voujeret.

Met an arme zo mat evit ar vro. Hag evit an dezertourien amnistiet, a rank mont adarre d'ar c'hazarn, war urzh Herr-Nukleer, :ant patron ar vombezenn neutronek gall. An abostol-se en deus ur chapel enep-atomek, goudoret mat. An dud zo chom endro d'an Enez-Hir a c'hell pedif Santez Anna ar Palud.

M.K.

Ar bed Keltiek
Kemper
2, Straed ar Roue Gralon
☎ (98) 95.42.82
STAL LEVRIOÙ
PLADENNOU
ARTIZANELEZH
SAL-DISKOUEZ TAOLENNOÙ

Roazon
"krampouezh mat..."
tí loík
rue de la Visitation, 32
pg 79 00 83

TAOLENN

KELTIA	
UR STAL LABOUR E KEMBRE.....	2
NANT GWRTHEYRN.....	2
NAONED E BREIZH.....	3
MEDIA	
PESEURT RADIO E BREIZH.....	4
S.A.E. HA RADIO FINISTER.....	5
RADIO ADOUR-NAVAR.....	5
HAG HOR YEZH	
AR "VIGNETTE", UR STOURM NEVEZ....	6
STAGADENN DA VREMAN.....	7
LIZHIRI.....	8
KELEIER	
BODADEG VEUR AR FALZ.....	9
KELOU LAOUEN AR GELAOUENN.....	9
LISANS	
UL LISANS A ZO.....	10
AL LISANS HA BREMAN.....	11
DONVOR EUSA KOLTARET.....	11
AR GWIR DA GOMZ.....	11
PENNAD-KAOZ	
GANT R.TREGER EUS STROLLAD PLOUGIN	12
BOMBEZENN N...EVEZ.....	13
TAOLENN.....	14
KEMENNADENNOU.....	14



KEMENNADENNOU

Digant an "FLB-Bureau Politique" :
 Goude larout en deus paouezet gant ar bombez abaoe daou vloaz,
 -dre m'eo bet dinerzhet gant labour ar bolis (hep bezañ diskaret memestra)
 -peogwir e c'hell an tu kleiz diskar kilstourmerien an tu-dehou,
 e embann eo echu adaozañ an FLB-ARB, hag emañ e bal sevel ur Stad sokialour breizhat.
 Da c'hortoz e c'houlenn gant ar gouarnamant nevez :

- ur gwir c'halloud politikel evit Breizh,
 - diskar an departamantoù
 - labourat da skignañ ar yezh,
 - dilezel ar binvioù-trevadennif (arme, nukleel, polis...)"
- O sevenif ar 5 poente-se eme an FLB, e tiskouez ar gouarnamant e youl da genderc'hel gant an ehan-bombez.

SKOL VREZHONEK

Graet e vo kentelioù kentañ derez d'ar yaou bep sizhun ha d'ar merc'her e ti an Holl (Harteloire) e Brest. Titouroù all en ti pe dont d'ar c'hentelioù war-eeun.
 (An Ao. Kerdoncuf-17, straed ar Forestoù Uhelañ- BREST).
KENTELIOU NOZ S.A.E.
 Kentelioù brezhonek a vo aozet dre holl e Breizh gant Skol An Emsav. Mar fell deoc'h gouzout hiroc'h, pellgomzit : (99)30.90.15. pe skrivit da Skol An Emsav 8, straed Hoche 35000 Roazhon

SKINWEL HA SKINGOMZ

Ar re o deus c'hoant - kaout kenskriverien d'o sikour war studi ar brezhonek, - prenañ skritelloù bihan bruderezh enep an alkool hag ar butun,
 - pouezañ war renerien FR3 da gaout abadennoù dereat e brezhonek,
 a c'hell skrivañ d'ar gevredigezh :
 "Skinwel ha Skinwel"
 9 bis str. Sant Visant a Baol 22000 SANT BRIEG

KEMENNADENNOU


KAMP ETRKELTIEK AR VREZHONEGERIEN 1981

Bet on bet e K.E.A.V. e Skaer e miz Gouere.
 Petra a vez graet e-pad an deiz ?
 Kentelioù ha kan diouzh ar mintin, kentelioù pe bourmenadennoù goude kreisteiz, beilhadeg diouzh an noz.
 Gant al live uhel e veze studiet pennadoù liesseurt, evel "Burev an Iwerzhoneg", tennet eus Carn, pe "Voar ar seiz peched capital" bet kiniget gant ur stajiad da ziskouez penaos e veze gallekaet ar brezhoneg gant ar veleien.
 Ur pezh-c'hoari zo bet savet diwar gontadenn Roparz Hemon "Ur prenestr a oa digor", ha filmet eo bet gant ur benveg-video. Evel-se e oa tu d'ar c'hoarierien gwellaat o c'hoari.
 Prezegenoù zo bet graet gant ar stajidi ha tud eus an diavaez. Per Denez oa deut da gontañ penaos e oa bet gounezet an aotreegezh vrezhoneg. Eveljust ne veze graet nemet gant ar brezhoneg, kouls er c'hentelioù yezhadur ha ... da vare ar skaotaj.

Y. Gwegan

BRUDAN AR BREZHONEG

Gant Kuzul ar (Rann)-Vro e vo roet d'an holl gerent e Breizh (Naoned ivez ?) ur follenn-vruderezh diwar-benn ar c'hentelioù brezhonek, hag abadennoù brezhonek FR3.
 6 pajenn zo, unan anezhe e brezhoneg. Ar re a gar a c'hell goulen ar follenn-se ligant ar CRDP, straed Antrain, 35000 ROAZHON.



MAKETENN SAVET GANT : Mikael Duval, Joel Donnart, Jil Killevere, Lena Louarn, Silvi Ar Mogn, Manaig Olier, Robert Rannou.

MOULET E : ti moulerezh al lisoù Roazhon
SAVET EO BET AN NIVERENN-MAN GANT : Manaig Olier, Tangi Louarn, Mikael Duval, Per Denez, Mikael Baudu, Loeiz Mahe, Olier ar Mogn, Herve ar Beg, Mark Kerrain, Yann Fanch Kerneis, Karin Legrand.

TRESADENNOU GANT : Malo Louarn, Nono.

FOTOIOU GANT : Paskal Ne, Lena Louarn

RENEREZ AR GAZETENN : Manaig Olier.

Ar pennadoù sinet ne engouestlont nemet ar re o deus savet anezho.

NIV. C.P.P.A.P. 62974

Kasetenn diskleriet hervez lezenn ha tennet 800 skouerenn anezhi.

A. BENN

UR MIZ

DEIZIATER

1982

SKOL AN EMSAV

